

CANTIK SANT PÈR

TON : *Ut queant laxis...* ou *Pange, solemnes...*



DISCAN :

Deut da henori he relegou santel,
 Pedomp oll Sant Pèr en envou ken huel.
 Ganthan en danjer ni `vezo divoallet.
 Gloar dezhan bepret !

Meulomp, kristenien, Prins an oll Ebestel,
 Selebromp hirio an desteni fidel
 A roas Sant Pèr d'he vestr muia caret.
 Gloar dezhan bepret !

Heuilla `ra dre oll Jesus, guir Vab Doue,
 `Vit prezec d'ar bobl lezenn ar garante.
 He galon a zo a dan, a ners carget.
 Gloar dezhan bepret !

Pèr, eme Jesus, gouarnit va Ilis
 Hag euz an ifern pilit oll ar valis ;
 Cassit va hano beteg an tirantet.
 Gloar deoc'h-hu bepret !

Mont a ra da Rom, neuze kear an errol,
Planta 'ra ar groas var lein ar C'hapitol ;
Ar fals doueou ganthan 'zo discaret.

Gloar dezhan bepret !

Neron, prins iffam, guerzet d'an oll vissou ;
A goudaon Sant Pêr d'ar brassa tourmanchou.
Mês Pêr a c'houlen bea crucifiet.

Gloar dezhan bepret !

O Patron caret, bennigit en deis-mâ
Ho pugaligou 'zo stouet oll amâ
Evit ma vezint gant Doue curunet.

Gloar deoc'h-hu bepret !



Imprimatur :

Corisopiti die 5 Novembris 1879.

† D. ANSELME.

O. S. B.

Ep. Corisop. et Leonensis.